

KANAOUEN

EVIT

AN DEDI EUS AN ILIS NEVES,

SAVET E PLOUMOGUER,

er bloas 1845,

an Aoutrou-n Hir, Persoun.

ac an

Aoutrou DESSON DE SAINT-AIGNAN, Mear.



Var ton Kantik ar Barados.

Pobl eus a Bloumoguer,
Me a garfe ober,
Eus c'chantik a joa
En deis ma da gana. } *bis.*

Ar bobl a Israel,
E kreis tan ar bresel,
A savas gant kaloun
Templ santel Salomon.

Pep hunan anezo,
Eb aoun rac ar maro,
El labour deis a nos
A choume eb repos.

Eleac'h pinvidigues
Ho devoa karantes;
Ar garantes zo krè
Pa zeu digant Doué.

Pénaos gallout guelet
Ty Zoué diskaret,
Eb klask ractal an dro
D'er sevel, d'er golo.

Lezomp ar bayanet
En egar da redet ;
An Doué a servichomp.
A roi sikour deomp.

Tud parrés Ploumoguer.
A velomp oc'h ober
Ar burzud erruet
En amser dremenet.

A possUBL eo lezel,
Eme ar bobl fidel,
Hon Ilis diabri
Evel eur c'hos koc'hi ?

Da youes ho fastor
Ho c'haloun zo digor,
N'eus nikun er Barrès
Na chich na didalves.

Yaouank, kos, bras, bihan,
E poantiont eb hean,
Ken a velont savet
Ho Ilis binniguet.

Gant laouenidigues
E velont an derives
Merket da celebri
Eus an templ an dedi.

Gant eur joa eb e far
Pep unan a lavar :
Brema en hon Ilis,
Ni glevo an ofic.

Kouls a Plougonvelen
Ni hell sevel hor pen
Pa vezoo kistion
Eus a Religion.

Lamber a Ploumoguer
A voar ive ober ,
Offranceou da Zoué ,
A templ de vajesté.

Henor , Ploumogueris ,
Déoc'h , hor c'henvrois ,
Ni enkanto beb deis
Ho larguentes , ho feis.

Diskoes a rit sklear
Da vourc'hizien kear
Penaos eo beo ar feis
E kaloun tud hor Breis.

Ne lavarint mui ,
Ar Gristenien impi ,
Ar feis a zo maro
E kaloun tud hor bro.

Sellit , *Philosophet* ,
Oud an Ilis savet
E Parres Ploumoguer ,
Gant Tud eus ho karter.

Ne dalves ket deoc'h ,
Klask terri ar péoc'h
Etre ar vretounet ,
Denvet a Pastoret.

A viskoas ar Bretofin ,
A zent oud e Bersofin ,
Zo fidel de Zoue ;
E vro a gar ive.

Kaloun , Ploumogueris ,
Peur-c'hrift mad hoc'h Ilis ,
Vit ma vo lavaret :
Savet eo ac orniet.

Biskoas n'eus bet guelet
Tyegues diskaret ,
O rei prof dan Ilis :
Kredite , va Brois.

Guedit digaat Doué
Pep seurt prosperite ;
Doué zo eun tad mad ,
Ne vezó ket ingrat.

Henor , honor afo
Da Jesus en hor bro ,
Gant ar guir vretounet
Ra vo karet bepret.

Mari , Mam a guerc'hes ,
Grit eur sell a drues
Oud ar Bobl a vreis
Vit ma talc'ho e feis.

Gant ar Religion
Eus peoc'h ac union ;
Lamit doujanç Doué :
Petra velot néuse ?

Chui , Sant Per hor patron ,
Dre ho protection ,
Grit ma vezimp bepret
Vel breudeur unanet.